


YOO KERCA

KROUIDIGEZH

AR

VAQUEZ



**gwilhou
trec'h~d'e~ouenn**

**KROUIDIGZH
AR
VAOUEZ**

EMBANNADURIOU KOMZ HAG ARZ BREIZHEK

14 SQUARE DU BOIS PERRIN 35000 ROAZON

emziskou ezjou un

evn preizh e breizh



ovni t_{HO} culture

Da ISSA M. ,
sammour evel don,
a gofesas din da-hed an nozvezh
a lakamp da liñvañ, e don hor
c'halonoù, holl dristidigezh ar
bed :

- e yezh hon trevadennour -

"Falc'hunerie sans falc'hun
est comme gaullisme sans
De Gaulle: un civet sans
lapin ! "



Kinniget c'hoazh

d'ar re o deus bet Yod-Kerc'h d'ar mare;
e ranker boueta p'emeur en oad da zebrin;
a-hend all e vezer troet da varvasenniñ.



Ludik

O HUNIN DA VAT GANT DANEVELLADUR VA C'HARTER-BRO :

- Che n'eo ket gwir kement-se!
- Eo, pa laran deoc'h ...


Marjanig Kuchenn-du ha Chann Dreut a oa o pikañ chupennoù e-tal ar stal ispisiri, ur sadornvezh. Diwar ur gaoz iskis e savas ur vojenn :

- Me 'bari n'ouifec'h ket peseurt gwalldaol zo degouezhet gant homañ all eus Kerradeneg...
- Nann 'vat !
- A feiz ! Me laro an dra deoc'h ... e-giz m'eus klevet kontañ...
- Ya ...
- N'emaoc'h ket o vont da gontañ da gement hini...
- Che, biskoazh ma buhez c'hoazh ! C'hwi oar mat n'emaon ket o vont d'ober, ta !

"Ar vazh treut", evel ma rae an dud anezhi a zibunas neuze un darvoud sabatuus :

- Honnezh eus Kerradeneg, pa ya d'ober hec'h abadenn marc'hegerezh, ha pa laka al loen da vont d'an daoulamm ruz, e teu he "zampaks" dezhi er-maez dre he genoù ..."

§§§§§§§§§§§§
 §§§§§§§
 §§§
 §



Yann Frank
e-c'houzoug

Lom Lonk
e-sizhun

Tin Kas-ar-ehog
d'ar-yar

Jos Ev-e-lodenn
ar-pardon

Erwan 74

Etre an ti-forn hag al lonkva, e-traoñ ar vourc'h, ul lunvezh, abred diouzh ar mintin, un troc'her moc'h lesanvet "Mañch-Ragout" o tihan da vezañ graet e zibab diouzh un dorzh vara hag ur frapadenn gwelien ruz.

- "Startijenn ! " - evel ma embanne an dikedenn
- "startijenn, ar yec'hed hag an heol e boutailh ... " a laoskas-eñ en ur vont tre, goude bezañ damzigoret an nor, trawalc'h dezhañ da 'n em silañ e-barzh ...

Darbet oa bet dezhañ pilañ Chanig, ur vaouez etre an daou oad, lemm he zeod ha prim en he doareoù :

- "Feiz ! " 'lar hi, "ken buan e oan pilet ganit ..."
- "Ne vin ket bet an hani kentañ marteze d'ober an taol deoc'h.."
- "Of ! Of !! Of ! Marc'h sot..." a skroñgnas homañ en ur vont er-maez.
- "Re aon en deus bet war an taol, Chanig,..." a laras ur vouezhig straner, evel ur yar o tiouganñ ur barrad bouilhard bennak.
- "Lod amañ o deus c'hoant da brezeg..." a respontas egile, "pa n'int ket gouest da ziforc'hañ etre ar vaouez hag ar vag-lien..."
- "Eo, re vat ! E c'hellan lar dit ez eo ur gudenn elfennel : evit mont war vor e rankez lakaat ar wern a-raok sevel al lien. Evit ar vaouez e vefe gwelloc'h dit sevel al lien a-raok ... ma fell dit dont a-benn d'ober un dra bennak ... a-barzh ober tra all ebet.
- Hag an hani ne sent ket ouzh ar stur, ouzh ar garregenn a raio sur ! " a laoskas an ostiz evit en em lakaat 'barzh ar gaoz.

- "Hag e oas ! " eme an troc'her moc'h...
 - "Hag e oan 'vez ! Ha te, sevel a ra dit er
 boutadoù-mañ ?

- Na chigardez ket anezhañ evel-se, kad e vefes
 da lakaat anezhañ da sevel war an noz, pe da
 sorc'henniñ, a zishilhas ar chober all.

An ostiz a gargas div werenn, rez :

- "Alle paotred, arabat deoc'h ober goap ouzh ar
 vicher... Krogit e-barzh, n'eo ket tomm !"

Ar gwer, savet gant ar brasañ evezh a reas cheñch-
 toull-pennig, a-raok dont da stekiñ war an daol santel
 en-dro. Dispeg dorn !... Nep d'an disterañ beradenn
 bezañ fennet. Ur wech muioc'h ne oa ket bet ar
 c'hrenerezh evit ar boaz. Ne 'z a morse marc'hadourezh
 da goll gant tud a vicher...

En ur ziskargañ gwin, an tavarnour a gendalc'has :

- "Marteze 'peus bet klevet hani ar skeul hag ar
 vaouez, nann ?.."

An daou geneil a chomas war vlasadenn o banne, alvaonet
 an tamm anezho. 'Pezh a lakaas egile da gas e gonchenn
 da benn :


- "Ar skeul a rank bezañ gwintet evit mont laez
 ganti. Ar vaouez a rank bezañ pilet !! "

Hag e tirollas da c'hoarzhin leizh e veg en ur vont
 d'ar penn all :

- "Me 'bari n'ho poa ket klevet un e-giz-se
 abaoe pell zo !.."

An daou siler dour a 'n em gavas o-unan, harpet ouzh
 an daol santel.

Tofignet oa bet dezho broud o awen, ha ret oa gortoz ma
 adc'hwezhfe an evaj ar c'houlouenn a enaoue o daou-
 lagad skuizh ha dourennek.



A-greiz-holl e tivoredas an troc'her moc'h, hag e reas un taol gant palv e zorn da skoaz egile :

- "Pa ouezi e tarzho da vouzelloù..."

- "Lar din neuze, a-barzh e teuzin gant an avi ..."

- "Na glemmez ket... Emaomp o tont e-barzh... Te anavez Lij-Stlap-he-bronnoù ? "

- "Tourc'h ! Da biv emaout o toullañ kaoz ? 'T'eus ket sellet pizh ouzhin sur !"

- "Beñ, pa glewi, 'to ket keuz da vezañ kavet da walc'h gant ar frotadenn gentañ,... peogwir out bet en da amzer gozh o klask frot outi... dre va soñj..."

- "Petra emaout o vont da fritañ din c'hoazh, loen doñjerus... Kontant a-walc'h e oa-hi diouzhin !!

- "Beñ... an hani stlap-he-bronnoù-se e tever ar staot diouti dre beder flistradenn..."

- "Marc'h sot ! Ha kollet 'teus da voulienn ! Biskoazh kement all c'hoazh ! Sorc'hennet out bet en noz-mañ ? "

- "Pa laran dit, ez eo ar wirionez, n'eo ket gevier sur ! ha peogwir emaout klañv gant ar c'hoant gouzout... da larout eo emaout dres e-giz Sant Tomaz,

e rankez lakaat da viz

evit kaout an tañva war ar pezh

a zamgredez..."

Paotr e gasketennkaledenn-c'hoz a waskas war e gorn butun.

An hani Mañch-Ragout a gendalc'he war e bouezig, ul lagad damsarret ha puchet dindan goudor ur vargurenn



fonnus, evel ul lapous bihan azblevek skoachet dindan askell-blufv ur yar-gloch.

- "Ha pa he doa merzet ne oa ket mui kement a dizh gant ar staot o tont er-maez, eveljust e oa savet c'hwen e loeroù ar vouilhez... Hag hi kuit da Gemper diwar-dizh da gaout ur medisin bras brudet a ra war-dro an traoù-se...

- "He, loen divalvennet... sañset emañ 'barzh da vutun pa zispakez kaoc'h da flaeriañ.

- "Ho ! Ho ! N'eo ket war zigarez out...


- "Na c'hortozez ket na vin bet doñjeret pe stamouzet evit kas da goñchenn da benn !

- "Ya... setu... ar medisin... a feiz, te oar, pa rankez labourat war seurt a dachenn, 'teus ket ezhomm da gaout aon rak nebeut... Erfin, evit ur gwaz a vefe dalc'het gant ur pistig o c'hoari vir ouzh e vuzhugenn... nebeutoc'h eget war lostenn e roched... n'eo ket dav. Mes evit ur vaouez, peogwir e rankez sellout pizh-rac'h ouzh kement korn... siwazh n'eus ket tu dezhi da 'n em dennañ gant nebeutoc'h eget... noazh-pilh-ran."

Egile all oa bet chichantaet dezhañ dre ma 'z ae ar gaoz war resisaat, ha diwar muzelloù gwrac'h en doa diwanet ur mousc'hoarzh a baras e korn e vourroù riellet. Kenderc'hel a reas ar chigarder :

- "Ha setu ar plac'h astennet a-c'hwen he c'hein war an daol... Ha va fareer-laou peg en he divorzhed da vat o sellet, o furchal pizh gant e lunedenn hir, e-lec'h m'emañ ar pep gwellañ gant ar vaouez. A-benn ar fin, en ur lakaat e fri sko ouzh "sal ar gouelioù", eñ a welas un dra lugernus

ha ront... Kemer a reas e durkez hag e tegasas
war wel un nozelenn toull-bragez !!



6/10/74

HAG A-ZIAGREIZ AR MARZH E WIRAS D'AN HUNER UN IJIN GAER

Pag e kavas gant ar bed breilhaouet doare distruj ha mazaouet e lazaz kabestr war o fenn gant kezeg e awen. Hag int d'an daoulamm ruz davetek dremmwelioù meurdezus e-lec'h ma vez ar poell oc'h ober al lis d'ar bed o kas. Ha trec'h pe dec'h an dra-se e gwirionez ?

An hun : ar breoù 'vez d'e heul a steuz gant bannoù heol.

Hag arvestourien zo tud dihun anezho, nemet e vefent, a-wel d'an holl,

oc'h adkrouiñ da vat, pep hani d'e vod, un dra a laka en argoll kredenn ha gouvidigezh diazezet.

Setu. Pevar c'hrouer - ha da bep hani e zigoroù - evit ur grouadenn.



Hag an avel a-nevez savet a-ziwar ar mor a blegas gwez rouez ar vro zizasunet war zu an douaroù, hag a daolas a-hed an istrevedoù ur strewadennad eus he c'haouad sall ha brout.

D'ar barrad kentañ e tiframmas e dog bouloutenn a-ziwar c'horre e bennad blev diskraodet evit kaout anezhañ en e zorn da reiñ luskell, hag e reas tizh da vont.

D'an eil e tihanas ronkal evit lezel en ur ronkonell :

"Poent 'vo din klemm pelloc'h !"

hag e reas ur prenn d'e c'henoù o soñjal n'en doa ket mui gwall-bell da vale, diskabell en avel, dre ma tiskoache diouzh korntroennoù Laezenn Kerzuleg, gleb-par-teil 'c'hwezhiñ. Pa oa degouezhet war blasenn ar marc'had, mall bras dezhañ divoumounañ, e oa-eñ, paour kaezh den paour anezhañ, o c'houlenn e vuhez. Ar gomz nemeti o tont gantañ a oa bet :

"Poent klemm !"

Hag e sankas dre biou toull dor damzigor ar c'hentañ ostaleri a 'n em gavas war e hent:

"Gwad Hor Salver" hec'h anv-badez.

Ar "samaritanez" a oa dres d'an ampoent da vat o tont laez gant diri ar c'hav, evel ur c'hwenenn-he-fav-koad, tarjip-ha-tarjip, ur gazeliad podoù sunik ganti.

O welet ar pratig o tont-tre e tistagas en he mouezh chichant ha gwic'hus war un dro, ma oa klevet gant an holl goskorad :

"- Me 'bari n'out ket deuet amañ da ober gaou ouzh ar c'hoñvers !"

Hag e c'hoarzhas gwalc'h he c'horzailhenn, ar skiserez anezhi, dre ma tirolle kement hani oa a-stern ouzh an daol santel da farsal ha da dennañ planioù war ar

mare, kalvez ma oa war e vicher, ar bouilh anezhañ. Hag eeun-hag-eeun d'ar reuziad-se e teuas e vinvijiri da faziañ dezhañ, kizell ha rabot ma rae ganto abaoe e amzer gentañ war e vicher.

Ma rankit chom da usiñ glaou gant traoù kozh, ne ya ho labour da du ebet ganeoc'h. Foar Bloneour a zegouezhe d'an eil wener diwezhañ ar miz. Setu oa kavet ha lakaet gantañ devezh d'an dispign bras.

Kouezhet diouzh e wele gant kan ar c'hejer en doa eñ sunet nerzh e valeadenn en ur pezh mell banne hani "molotov", goude dezhañ bez' kaset war-draoñ rouzig an diraouliañ, koefet a-zoare, ken na teue c'hwez ar moged da hilligañ deoc'h blevenn ar fronelloù, hag an daou-lagad da zisloagal. Un druez hen gwelet ! Mag e vije bet stag ul levad alese, sur en dije drailhet e fun, lammet e nask a-ziwar c'horre e benn, pe dichontret e strapenn diouzh an douar evit diredek dre-douez ar c'horz davet ar fistolenn drammus, par d'ur gazeg loñgn, loen friant anezhi, o vont 'n araj tra ken o klevet kaoz d'ar c'herc'h, hag o tichafrantiñ he sternioù ler evit plantañ ur c'horfad da greviñ. Un druez klevet hen envel !

Ha bremañ, loc'het kuit war ler e votoù, e lede e c'haoliad kammigeller

"trois fois cinq quinze

huit et quatre douze"

war-zu ma pare e sell izel ha pell, hag e yae, hag e yae !

Ken na... ken na... ken na... ken na charinke e zent en ur skarzhañ gant e hent.



ludik

Yann-frank-e-c'houzoug oa ennañ danvez an hani kentañ. Deuet 'oa da foar Bloneour, c'hoant gantañ ken na vouge d'ober mizer bras d'e gorf. Evit laret an traoù evel m'emaint, n'eo ket ur vro evit kristenien an hani ma oa ma faour kaezh treu o chom e-barzh en enni : sabl rouez betek an dremmwel, korzennoù gwaret gant an avel skarnil, hag o tarzhañ amañ-eno war un oabl kemm-digemm ur wezenn-bin noazh-skarn-tort : n'he doa ket laeret hec'h anv,

Bro ar sistr Tregenneg, hani an avaloù-pin; rak evit ar wech n'he doa gouzafvet tourmant ar mor gouenn all ebet da dalvout outi estreget pinenned.

Klaskit gouzout digant re an douaroù a gav o zu o c'hoari goap ouzh debrerien birinig ar Palud, hag-eñ ne vezer ket chigardet a-bep seurt feson, dic'houmor evel m'emeur d'ar seizh avel war-an-ugent a ya ganto lien ho korf e chalpizennoù !

Na pa vefe ken evit kavout un andorenn d'ho staotadenn..

Selaout re an douaroù ha ne zeuio ket keuz deoc'h da vezañ intentet ar banell ma vezer kemennet ganti dre-ziaraok :

"Difennet-krenn eo da gement ki ha da gement den strezhañ ouzh ar gwez."

Kentoc'h evit chom berr, m'ho peus da deilañ, en anv Doue, - ha meulet ra vezo - gouezit anv da harpañ keit ha ma kavfot gras ur c'hleuz d'ho andorenniñ. Petra... Kenkoulz da unan bez' en e aez, zoken evit cheñch dour d'e besked, pe da lakaat an dalmerez da yudal. N'eo ket gwir ?

Hag o chom e oa Yann-e-c'houzoug er vro ziaotreet -se, forbannet dioutañ e-unan. Bevañ a rae bevaik dre vroc'hañ douar d'un nebeut irvi aval-douar ha kaol-irvin ha dre ziruskenniñ un tamm koad mare-

"romatizet kranien" nevez arruet dezho :

- "Un dirañvad deoc'h dont war ho treid eus keit-se..."
- "An dra-se 'zo en em lakaat 'vat !"
- "Ma vijes bet deuet diarc'hen, sell aze 'vijes bet lijer 'vat... !"
- "Lakaet 'teus un taol Yann, dont a ra ar moked diouzh da zivskouarn."
- "Petra 'faot deoc'h ostizez, p'emeur da vat, emeur da vat !"

Ar paour kaezh chober a heje-diheje e zivrec'h o poanial da gaout e anal, mizer dezhañ dic'hwezhañ, kaer en doa tennañ warni. En ur c'hortoz ma teufe-hi dezhañ en-dro, e teuas a-benn da zistagañ :

- "Marjanig, ma chomit da zihan e kouezho ar skuishentez war ho korre..."

An ostizez a zihellas war e du.

- "Me 'bari, 'maout o tideotañ gant ar sec'hed !" a laoskas-hi.

Ar goskorad a skrognas.

Lonk-e-sizhun, a gave dezhañ en doa c'hoant da lakaat e brezeg ivez, a c'hoapae :

- "O... Diskennit d'an den-se ur c'hreizik mell banne hani hir, dezhañ da evañ a-barzh ma teuio un aer re zistruj warnezhañ..."

Paotr-ar-c'hwezenn-eonennet-'hed-e-gorf a reas ur prenn d'e javedoù.

- ...- "ha lakait ur chik mell banne traoù dous e-kichen, kentoc'h evit chom berr, peogwir, aezmat deoc'h gouzout Marjanig, pa dec'h ar vuoc'h diouzh he zamid geot-melloù, peurvuiañ evit ur chadennad peuriñ d'ober teil dindani nag eo..."

Hag e chomas etre skroñgn ha skrifñgn mousc'hoarzh e veg mell o c'hortoz ur respont. Egile, dre ma oa o ober ur frap d'e vanne, a gemennas d'an ostizez :

- "O vezañ hon oad deomp hon-daou, ne dalv ket din mont da blantañ ur pur e-barzh en ennañ. Gant an Druez ! Na laoskit ket ar paour kaezh bougar-se da c'hlaourenniñ, 'mañ an dour o kouezhañ diouzh e c'henoù. Taolit dezhañ ur banne a-raok 'yelo magnous... evit kaout peoc'h.. 'mañ o tic'houzougañ klask kaout ?"

- "A ! Prezeg deomp ! Prezeg deomp !..." a zistagas egile, divoumounet dezhañ.

Fesonioù arnev a oa ganti. Ul lazh da Vab-e-Salver ! Dre eurvad e oar an avel anv da ziskenn e toull ar glav, bep-a-reuziad. Gant ma ne chomfe ket re bell ! Setu preder ar bigoudenned pa vez o gwazed o tebrifiñ ar voujedenn dre fistolennata.

Rak aze 'mañ gwaskenn ar vro-mañ: ma kouezh an avel e toull ar vigoudenn, ez a sizhunvezhioù en o fezh etre lukachenn ha bouilhardoù, mintinioù soubet er vogedenn, hag abardaezioù latous. Ha bep eil wener diwezhañ ar miz e krene mogedenn ar wrez uc'h da baludoù ar vro zizolo.

Mes eñ ? Pelec'h e vije bet aet gant e amzer ?

Na vouezenn jeun, na skrañnadenn gozh da glask tennañ kaoz dioutañ, da zoujiñ da yun ha vijil, ha da chigardiñ pag e oa ar mare d'ar chon da ziskuizhañ war-lerc'h.

Yann-frank-e-c'houzoug, paotr yaouank kozh a oa digor frank dirazañ an istrevedoù ma rede an druilhez drezo. Pared a gave avat, da zougen yec'hed da hed nozioù-beilh arkus.



ludik

En o zouez Lom-lonk-e-sizhun, mezhvier ha klasker-sistr
baleer-bro eus e stad, boser a-hend-all peogwir e oa
bet desket dezhañ ar vicher.

Ha d'e heul Tin-kas-ar-c'hog-d'ar yar - ouzhpenn da se
oa likaouer - lesanoiet, pemoc'h badezet anezhañ, abaoe
m'en doa, en amzer ma oa mevel en ur gêr, karget un
hoc'h da gas evit bezañ goloet, un hoc'h ma oa e graou
sko dres ouzh hani ar wiz ludik e reuz tourc'h !

An div zor a oa kichen-ha-kichen.

An abardaez oa.

Ne oa ket mui ar mare da lakaat kemm etre ul loen e
dirigezh pe get.

Pa soñjer mat...

'Pe soñj 'maoc'h !

Abaoe, pa ne ouie mui diouzh petra en em lakaat,
e oa deuet da vezañ alc'hwezour foet-e-voutig,
itik.

Neuze, a-seul-da-seul gant an tri zruchon all, Jos-Ev-
e-lodenn-ar-pardon, mab kaezh bougar anezhañ !
Golc'hedour a 'n em darlaske ingal evit hejañ e c'hwen,
tok kalabousenn war e benn,
pastell e roched war e benn all,
a oa anezhañ un tamm kagallek,
o tont toupart-toupart,
o vont koutik-koutik,
pikoù panez war e zremm,
pell gwinizh ha barv heiz
leizh krin e grubell
Sell aze tres ur golc'hedour !



Ha ma ne oan ket o prezeg eus tu ho skouarn fall pa laren deoc'h e oa va Frank-e-c'houzoug kecher e-touez ar gecherien, pa gave par dezhañ, ne yafec'h ket betek goulenn ha mignonoc'h e oa bet d'e vanne eget kustum d'an eil wener diwezhañ-se pa vo anzavet deoc'h krennha-kras e veze an tri oristal all war o fenn e ti ar "Samaritanez".

Rak goude friantal, flechaouiñ ha redek ar c'hwitell, e kase holl garigelloù ar vertuz da doull-dor "Gwad Hor Salver". Ken ac'han e vije bet en em santet re ziskuizh adarre...

Mes evit ar mare e oa pep abostol en e wrez: ur goan-sakr da welet !

- "Neuze, evomp gant yec'hed paotred baour...

'Benn arc'hoazh 'vo ket tout ar re glañv en ospital !" a oferennas Ev-e-lodenn-ar-pardon evit lidañ an n'ouie ket e-un' pet troiad war-an-ugent war-nes mont da greskiñ ar jiletennad traoù a oa gantañ.

Hag e yelas gantañ un talkad all renet en e dreiz gant monedonea e vos-lagout. Ne oa ket den da strinkañ an trebez war-lerc'h ar billig keit ha ma vije bet chomet toaz er bodez. Ha deuet da gilañ ar vag diouzh ar sec'h ne oa ket, pag en doa lakaet lien warni ur boutadig oa.

- "Tizh barzh 'r vag !

Ha bec'h d'ar brezhilli."

a zassonas dezhañ ar marsikod

Lonk-e-sizhun.

- "Evel-se bezet graet !"

a laoskas en ur vouezh a-zoare, ar goteried all.

Hag e rajont ur frap adarre, o soñjal e oa ret dezho dic'houelediñ holl dristidigezh ar bed.

- "alle ma c'houch !"

a stranas Kas-ar-c'hog-d'ar-yar evit reiñ da c'houzout ne vez ket distag ebet etre tre ha lanv. Hag ez adc'halvas an ostizez. Mes homañ :

- "O... bremaik-tuchant-bremaik ne vi ket kad mui da herzel na penn na revr... Bez 'zo leizh ar vag ganit pelloc'h... nann ?"

a jezuzas homañ-siwazh-dezhi, bet kaset penn he sonenn 'benn neuze, dre forzh soniñ dezhi.

An hani genoù-gwelien all ne zihane ket goulenn luban evit kaout e vanne a reas e vuzelloù gwrac'h da reiñ da gompren n'en doa ket bet e walc'h.

E gamaladed a selle distruj outañ. Deus tomm d'e glipenn ha lijer e deod en doa bremañ en em gavet ponner e zivesker dre benn d'ur boud gantañ stumm ha doare da vez' diwanet diouzh kostezenn MANOS, dre, diaes dezhañ da c'houzout, pe strobinnell.

Frank-e-c'houzoug 'vez a soñje e oa gwall zirukel diskennadez Bena, a gavas he zu o kinnig an aval - unan c'hwerv-brizh dre e soñj - hag a nac'he bremañ diskenn gwinn d'ar micherour ! Ha war an taol e kavas dezhañ e oa divlaz boued pasket Aviel.

- "Kentoc'h evit kaout fachidi, a grennas-eñ, e yimp da cheñch avel d'hor filhoù... Abaoe an amzer m'emaomp amañ o pilpasat he deus bet al leur-zi amzer da balumiñ.... Teuimp ket mui da

gailhotiñ !"

Ha ma fevar lorikenneg ha mont 'maez.

Ar monet-heol 'oa...

War blasenn an Iliz, o tegouezhout 'benn dezho,
o tont war-eeun diouzh ti an Aotrou Doue, Mab
Sant Per, seder gant e gof diroufenn - pell 'oa
n'en doa ket gwelet beg e dreid, daoust dezhañ
da gaout daoulagad stouet - hag ouzh e heul -
homañ a bare he re ingal war an neñv - e seurez
wenn, ruspinn he jodoù.

O welet ar pevar Jañ-blev, diskwabodet dezho evel o
tont 'maez diouzh ar wazh, e kanas hemañ en o c'heñver:

- "Distagit ho korf
diouzh madoù ar bed-mañ !"

- "Sellit ouzh ma c'hof
ha grit pinienn !" a ziskanas dezhañ Frank-e-
c'houzoug ;

hag a-grenn e vourennas: ur flistradenn rokin a
ziflipas eus korn e c'henoù, ar peurrest a ziflistras
a-hed e chink. Un taol sec'h-mañch a-dreuz, ha tres
ar pardoner mav endro war va fratig.

Ken na baras peragenn ha sabatu war muzelloù an Aotrou
Persoun... kollet gantañ e latin hag e vrezhouneg
ledan... e roas da glevout ur "car ils ne savent pas
ce qu'ils font" a gizadenn.

Gant kement bater e vije bet di-Verckxet ar v-Belgiz ;
mes ma fevar c'hecher mignon d'o banne, troc'het krenn
dezho dudi o bevlec'h, a oa gwashoc'h dezho evit m'o
dije bet baleet war an aour-yeotenn: goude bezañ
pennadet hent strebot-distrebot a-hed istreved ha
karrigell, e oant c'hoazh, damgollet, o klask o

riboulenn, pep hani gant e seizh mallozh war-an-ugent er penn.

N'oufen ket laret deoc'h da behani e teuas keuz da vez' chomet hep mont da glask e bask pad ur geit amzer.

Da Din-kas-ar-c'hog-d'ar-yar atav na teuas ar barradig -broez-mañ :

- "Mes pelec'h 'mañ an hent da zont kuit diouzh Ploneour ?"

Kaer o doa troiñ ha distroiñ er vorc'hadenn, kollet ar sterenn ganto !

En un taol e loc'has Yann-frank-e-c'houzoug, gaolgamm, bihan an hent dezhañ, da vetek krapenn gammigellek Krec'h Kilvid. Hag ar re all war e lerc'h 'giz ur vandennad chas bihan, mizer dezho bez' mestr d'o c'horvad, ha par da gwizi leun o vont gant o hent.

- "Petra zo o vrochiñ dit da revr ?"

- "Hemañ sot a gasfe un' d'an aod !"


- "Te zo 'vont diouzh ar c'hwezh, marc'h dall ?"

- "Foer, foer, foer barzh e dammig otoù ! Foer Foer Foer..."

a vouskane an trede da zrezeviñ e gerzhed kanig-kamm d'egile-all.

A-greiz-pep-kreiz e chomas an heñcher a sav dre ma tostae ouzh Krec'h Kilvid, ar re all ouzh e heul, d'ar piltrotig; a-sav, gant e veg digor war nav eur, kouezhet e veud e boz e zorn, sabac'het, strafuilhet, chifet, chougadalet, a-dal d'ur pengos krakennet, ma tarzhas evitañ d'an deiz-se skleurenn an amzerioù nevez, dic'hortoz evel ma oa dizoloadenn e froudenn deiz, e sevenn-noz.

An tri abostol all a baras ur souezhadenn war o zal, hag int hag ober un hej d'o abrantoù, a lare :



- "Kaezh bougar paour... emañ o tizatiñ !"

mes a droas da

- "Petra 'maout o laret ? 'Mañ ket difaragoellet da dammig boulienn ganit pelloc'h ?"

a sonas Ev-e-lod-ar-pardon o tistagañ un taol gant palv e zorn da skoaz egile.

- "N'eo ket dav dit moñsañ ac'hanon e-giz-se, eo ?

Tri mil gwerc'hez aet druzivi da nozvezh ar Pellgent !!!"

Imoret ! ma oa eus e skopigell rokin rous ur chintradenn o tiflistrañ heuliet gant ar peurrest o tiflipañ dre gorn e c'henoù brondu : trawalc'h da lakaat alvaonet frioù-kreien ha moizenned jeun da vont e marv-bihan. Eus don e chakod bigrier e teuas gantañ prenaenn ar mintin : kizell ha rabod.

- HAG E KROUAS AR VAOUEZ WAR HE BOLC'HADENN GENTAN

Gant ar gweled eus ar penngos o koll e neuz skolpenn goude skolpenn, an tri oristal a bichas o divskouarn war an tu 'raok. Kadaoniet d'e labour - dre loariadenn a grede d'ar re-mañ - e reas ur gasadenn gant teir. Ha pa savas kein en-dro evit ober e gorfad lorc'h, ne oa ken 'met ar fogas holl anezhañ.

- "An dra-mañ n'eo ket pistokañ ! Prezegit deomp deus kizellañ ! En tu all da Gillivig na gea !

Ha pa glaskas e hed evit taoler ur sell war e oberenn, e oa hi aze, maouez penn-da-benn he c'horf, hoalus ; ken na vije deuet keuz d'ar re all da vez' lezet ar plas da yenañ.

Ne voent ket seizhdaletoc'h a-raok gouzout e oa ret

mat dezho lonkañ o begad kentañ, ha tampir ma'z afe dre an toull gaou evit kinnig ur poulloud bennak eus o yod-kerc'h. Hag a-barzh ma vefent bet mezhekaet, tapet cheulk ma oant !

Setu na chomas gour ebet da huanadiñ e c'hoant kaout kaletvezh-toaz da zevezh gwener.

Ha tin-kas-ar-c'hog-d'ar-yar eveljust d'ar penn kentañ ! Gwennet ra vezo gant an holl zoganed evit e wallegezh ! alc'hwezour tal ar c'hoc'hu kozh anezhañ...

Eus koatet he c'horf ha mouzhet he fenn-a-dreñv e teuas dezhi, dre benn d'ul likaouer, neuzioù an ostizez fraost. Disterat afer he divorailhiñ ! Pag e ya kement alc'hwez d'he digoriñ, kement troad potin d'he didaliñ, kement pich flech d'he grimandelliñ, ha kement pav flav d'he flaviañ. Evit gwir,

"n'eus ket a gozh botez

na gav he farez

nemet devet e vez !"

Ar golc'hedour daouarn-yod a 'n em daolas er stern war e lerc'h ne voe ket kennebeut diouzh ar re a zistroio ar c'halonoù diouzh ar melre a bemdez.

Jos-ev-e-lodenn-ar-pardon a lakaas e boan d'he bourellañ a oa faziet dezhañ ar banne a laka barzhoniez ar bed da flamm-flammañ ouzh selloù ur golc'hedour : ranket en deus lezel ar reun d'an tu diavaez. Ha setu an daou zen divalavañ da gavet : paotr hep barv ha plac'h barvek.

Kas-ar-c'hog-d'ar-yar - hag endro !

'benn ar wech-mañ ne ziwano ket dezhañ divaskell e baradoz an Doganed - en doa c'hoant lakaat e brezeg adarre, a glaskas gwellaat an ijinadur anezhi.

Rak evel ma ouie laret dezhañ e sakrist a bevar
Lonk-e-sizhun :

"Fall eo an enez ma n'eo ket evit ar
c'hilhog !"

Eñ mont hag ober diouzh se.

Ha setu perak, pa yelas Lonk-e-sizhun evit ar
vistradenn da lakaat e anv war-e-lerc'h, e kavas
sal-ar-gouelioù sko ouzh ar privezioù !

Ijinourezh kas kaoc'h da foerell !

Yann, Yann Yannig Yann

Yann Diwech Yann

teotet hir ha dornet berr,

dre benn d'ur boser chigacher,

a doullas gwad da wener

Diremed en em laka-hi da wadañ ur wech

ar miz.

Hag e ran ganti memestra !

Rak kant klevet na dalvezont ket ur gwelet !

Gwilhou-Trec'h-d'e-ouenn,

bigouter ludik ha

kernevad lonker brein

seul vui ma'z argad

seul vui ma'z orged

an doare brezhon

da "Make love, not war"

Yod Kerc'h - niv. 6

Renerez: Catherine Colleter

Moulet e Club Léo Lagrange

Roazhon

1000 skwerenn - Priz: 3 lur

Diskleriet hervez lezenn :

Trede trimiziad 1975.

Niv. CPPAP : 56577